

- 73 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

110. AR BOLONJERIEN

(follennoù 72 - 75)

Mar plich ganec'h sillaouet ag e kleffot kana
 eur chanson a zo kompozet a nevez evid ar bla,
 eur chanson a zo kompozet pini a zo présant
 a zo erruet en Bourdel gant pevar pot iaouank.
 Evid ref deoc'h da intent ar sonn, bretonnet skler
 nagevid a vocation in pevar bolonjer
 Pere a ias eun dervez d'an tavern da heva
 a digarez e neum bourmen ag e neum divertissa.

Pa voent var bord ar rinvier gant o pourmenaden
 enon o deveus bed renkontret eur serten fumelen.
 hag hi vond ag o fedi da vond gato er prad
 en digarez e neum bourmen en choñjal e hattrap.

Konsanti a eure ganto moned ar fumelen.
 - Me a kleo va mam, a mezi, er ger doc'h va gervel
 Dallit, potret, emezi, dallitu va faner.
 Brema souden me erruo pa vezin bed er ger.
 Ar plac'h en devoa skient pini ne voa ket ber,
 Ag e lezel enon plantet ar pevar boloñjer
 An n'abardae a zidosta, an eol a izela
 e teujon treuzek Bourdel evid goulennet
 pa int arruet en Bourdel o deveus goulennet
 eun ostiz ag eun ostizez o deveus rankontret.
 - Roit deomp eur kamp a gostez a preparit-ti mad
 arc'hant a zo evid pea nen domp ket dud fallak.
 Ne voant ket peurchervichet demeus eur voutaillad
 ma voe klevet ar bugel er paner e vouic'hat.
 An ostis, an ostizez winwac'h o deus klevet
 gant ar vinss demeus an erc'h a zo pignet da vellet,
 ma krogas an ostizez en tourgen (kromelen) ar paner
 ma remerkas eni ar form a eur bugel
 - Penos, potret, emezi, na no c'heus ket a spont
 donnet var zigarez eva da renta din affront.

Kaer o devoa esplika penos e voant bed tizet
 ar justic deus a Vourdel a zo bed digomenet.
 Neuze int bed kondaonet da vezur ar bugel
 Petek an oad a no blaz ar pevar bolonjer.
 Ar bed oll a estonne tro var dro da Vourdel
 e vellet penos e voa tizet ar pevar bolonjer,
 e vellet penos e voant tizet e klasq attrap ar vam
 renkont mezur ar bugel, setu rentet infam.

~~~~~  
 vvvvvvvvvv

Mari Bozeg 18 févr. 1851

~~~~~  
 vvvvvvvvvvvvvvvvvvv